

KIS-369 – Gl. cachet, gélule, comprimé

(GE – 06 11 89)

MELLADOÛ EUS AN DANVEZ GERIADUR AR VEZEKNIEZH

Gl. **bigélule**. Br. **daouvolc'han** g.-où.

Furm wezher o c'hoarvezout a zaou volc'han, an hini bihanañ o vezañ engronnet e-barzh an hini brasañ, hevelep ma c'haller diounit en ur ser div zanvezenn hep o meskañ. Sl. **gélule**.

Gl. **cachet**. Br. **kached** g.-où.

Furm diounit ar gwezherioù o c'hoarvezout eus div gibig bara dic'hoell peget dre o genou ha lakaet etrezo un danvezenn hueek.

Gl. **comprimé**. Br. **moustrad** g.-où.

Furm wezher o c'hoarvezout a zanvez hueek tolpezet dre voustrañ.

Gl. **comprimé à couches multiples**. Br. **moustrad liesgwiskad**.

Moustrad o c'hoarvezout eus meur a wiskad pep a ambrougenn dezho, ar gwiskad donañ o vezañ an dilerc'hiusañ da zilaoskiñ ar wezhuzenn.

Gl. **comprimé à double manteau**. Br. **moustrad pallennet**.

Moustrad o c'hoarvezout eus ur graoñell greiz graet gant un ambrougenn o tilerc'hiañ dilaoskidigezh an danvezennoù gwezhus, hag ur vantell dro, enni ur wezhuzenn verrzilaosk.

Gl. **comprimé à libération prolongée**. Br. **moustrad hirzilaosk**.

Moustrad euvriñ (pallennet, liesgwiskaddek, h.a.) o tilaoskiñ gorrek (betek 24 h) an danvezennoù gwezhus enklozet ennañ.

Gl. **comprimé pour la voie buccale, comprimé oral**. Br. **moustrad euvriñ**.

Gl. **comprimé pour la voie perlinguale**. Br. **moustrad teodel**.

Moustrad a zalc'her dindan an teod ma tileizh goustad endra vez suget e wezhuzennoù gant glaourgenn an teod hag ar genou. E renkañ a reer e-touez ar moustadoù sugañ.

Gl. comprimé pour la voie vaginale, comprimé gynécologique. Br. moustrad gouinel.

Moustrad sugañ o tilaoskiñ e wezhuzennoù ouzh glaourgenn ar gouin.

Gl. comprimé retard, pellet. Br. moustrad arzilerc'h, feran g.-où.

Furm apotikel o tilaoskiñ gorrek tre (etre un ha lies sizhunvezh) an danvezennoù gwezhus enklozet enni ; peurliesañ e sanker ent surjaniel ar moustradoù arzilerc'h er gwiadoù.

Gl. gélule. Br. bolc'han g.-où, gelul s.-enn.

Furm wezher o talvout da ziunit meskadoù hueek dre euvriñ, anezhi daou hantervolc'han gelatin penneget an eil ouzh egile.

□ Notenn a-zivout ar furmoù bihanaat dre *-an* :

~ ar furm dre *-an* diwar un unander ne gemm ket ar reizh ; sk. : *gwreg* b., *gwregan* b.

~ ar furm dre *-an* diwar ur strollder a vez bepred gourel ; sk. : *bolc'h s.-enn*, *bolc'han g.-où* – hogen *bolc'henn* b., *bolc'hennan* b. (reolenn houmañ eur degouezhet ganti da heul ur genstudi renet war an Iw. hag ar Kb. gant GP ha TAM).

GERVA BREZHONEK-GALLEK

ambrougenn excipient.

berrzilaosk à libération rapide.

dilaoskiñ libération.

dilerc'hius retardateur.

diunit administrer (un médicament).

euvriñ ingestion ; absorption (par la bouche).

gwezher agent (médicamenteux).

gwezhus : *danvezenn w*— principe actif.

gwezhuzenn principe actif.

hueek pulvérulent.

kibig cupule.

tolpezet aggloméré.

sugañ absorption (par les muqueuses).